

AMZER AN DRAPO GWENN

MEULEUDI AR REPUBLIK

Bremañ tud vihan ar vro, hag etrezom peorien,
E hellom 'n'em rejouisa gand eur galon laouen,
Derhel a ra an drapo trikolor en on bro,
Ya, en desped d'an noblañsou ha d'o hamaradou.

Ober a reer e-barz ar Frañs, desped d'ar veleien,
Da baotred an drapo gwenn soucha war o zorchenn,
Allaz, 'n'em drompla reont siwaz, tud an noblañs,
O soñjal gand o fri treitour dond da houarn ar Frañs.

Beza zo deuz on gouarn tud hag o-deus skiant,
Pere a deu d'om difenn e penn ar gouarnamant,
Ar re-ze o-deus ampechet paotr e liviten
Da zond da grouga ar paour evel eun anduillenn.

O ! Beza zo c'hoaz siwaz, kalz a Vretoned,
A garfe gweled o bro gand an nobl gouarnet,
Hag a deu da vepriza ar republikaned,
Beza deuz an esklavaj anezo bet tennet.

An dud-se a glefe dond da lenn istor o bro
'Vid goud o-deus o zud koz bet kalz a zoufrañsou,
Dindan an noblisite hag an oll veleien,
Ar micherour ha Yann gouer a oa esklavourien.

Ar paour, barz en amzer goz, ne oa mad da netra,
'Med da labourad noz-deiz en e doull da zoucha,
Ne oa ket mad da dest, na kennebeud da voti,
Tretet e veze siwaz gwasoh evid eur hi.

Goude e ranke labourad, koulz en noz evel en deiz,
'Vid beva ar veleien, an noblañs, ar roue,
Ne oa ket mestr en e di, d'e wreg, d'e vugale,
Gwerzet veze er foariou 'vel al loened ive.

An noblañs ken didruez, 'vid en em egzersi,
A-benn mond da chaseal, gedon ha klujuri,
A ree d'o zud koz redeg evel gad araog ki,
Tenna neuze warneze 'vel tenna war bleizi.

Ken braz veze ar gernez siwaz e-barz ar vro,
Ma kaved war an hentchou kalz a dud varo,
Leun o genou a yeot o klask en em zoulaji,
Heb ma kemere an nobl truez ouz a hini.

'Vel sparfell en e neiz e veze an Aotrou,
Er heid-se, en e gastell, leun a lorh hag a bompou.
Med, pa deue ahano d'ober eur bale,

Lahe kalz a dud dre leh e tremene.

'Vid laha gad pe glujar, war douar an Aotrou,
E veze lahet an den evid ar henta deziou,
An nobl a lahe ar paour heb kavoud tamm truez,
Pevar gwenneg warn-ugent a oa priz ar vuhez.

Pa 'n'em gave da bourmen en ho ti,
Ma veze ar vamm pe ar verh deuz e fantazi,
E vezent gwallet gantañ barz prezañs an tad.
Hag an dra-ze, d'an den paour, kredit, ree kalonad.

Ha pa gemere afer daou zen euz ar bed,
E ranke ar wreg nevez, noz kenta heb eured
Mond gand menah pe noblañs, da gousked en noz-se.
Ar paotr, kenkoulz hag ar plah, gave gwall ziêz se.

Pa vanke an den ive da baea e Aotrou
E veze barnet gantañ d'ar rusta labouriou,
beteg ampech ar raned da gana pad an noz
'Vid ma hallje an Aotrou hag an intron repoz.

Ha pa lare an den paour eur gwall gomz bennag,
E veze e berr amzer gand an dud fall lahet,
Lakaet veze deuz ar groug e beg eur wezenn uhel,
Da zebri gand ar brini, d'heja gand an avel !

Ar veleien a gemere, ya, an degved lodenn,
Deuz trevajou an douar, poan al labourerien,
Hag ouzpenn an drederenn deuz o mobilier.
Goude maro tud ar paour, o ! na trist amzer !

En amzer ma'z om o ren dindan ar republik,
Ar paour e-neus e liberte koulz hag ar pinvidig,
Ha deuz poan e ziouvreh e hell tenna parti,
Heb ne hell beleg na noblañs dond d'e gomañdi.

Oll ez om ingal bremañ dirag lezenn on bro,
Oblijet oll d'he difenn beteg ar maro.
Pa vezom bremañ ataket gand on enebourien,
An noblañs a rank tañva lod deuz ar zoubenn.

Dre ze, noz ha deiz, bremañ zo droug en ho halon.
Pa rankont sikour difenn o bro hag o hanton,
O ! Pa vezim Bretoned gouarnet gand an noblañs,
Ne vo nemed ar beorien neuze o tifenn ar Frañs...

An noblañs n'he-deus kavet jamez eun dra diêz
Ober inutilamant redeg gwad ar paour kêz.
Pa devo lakaet laha siwaz deoh ho pugel,
E vo seder o halon e-barz o hastell.

Klevet zo bet aliez, koulz tadou 'vel mammou
O lavared gand glahar, beuzet en o daerou,

O-deze bet o bugale, ya, eur maro kruel,
Lakaet fin en o buhez e-kreiz tann ar brezel.

Goud a rit sur Bretoned, eo bet gwerzet ar Frañs,
Gand ar veleien siwaz koulz ha gand an noblañs,
Ha c'hoaz o-deus c'hoant bremañ da zond d'on gouarn
D'ober treuzi on halon gand plom, dir ha houarn.

Ar republik on gouarn, abaoe pell amzer zo,
Hag a glask al lealded, a houll ar brezellou (?)
Difennom 'ta anezi gand eur galon laouen
Evid mad ar bobl izel hag ar beorien.

CHANSON WAR AR FABRIGED

PE WAR GESTERIEN AN ILIZ.

Tostait oll d'am zelaou, eun tammig, Bretoned,
Ha c'hwi a glevo eur chañson a zo nevez gompozet,
Hag a zo greet d'ar veleien pere a zo en or bro,
Ha d'ar re a vez o kestral e-barz an ilizou.

Evel e vez eun ofiser, oh ober an apel,
E teu eur beleg da zul, hag aliez d'ar pemdez
Da bignad barz ar gador da envel kesterien
Da bourmen barz an iliz, da houlen aluzen.

Evid kestral da Zant Per ema Jakez tro an henchou,
Hag evid ar Zakramant, Fañchig tro ar parkou,
Ha d'an aotrou Sant Alar ema Yann goz voutez
Hag evid Sant Barteleg, Pipi mab ar vatez.

Da gestel d'ar Rosera, ema Janned kouillourenn,
Hag evid Santez Barba, Izabel krav he 'fenn.
Ar pevar gester a zo dalhet e-pad ar bloaz,
Hag an diou gesterezig, e-pad ar miz kenta.

Setu aze Bretoned, apel braz ar person,
Ha senti outañ 'vez greet heb kompren ar rezon,
Mont a reer d'ober an dro, eur beñsel barz eun dorn,

E-kreiz an ofis divin, pebez pehet enorm !

Tro henchou houll da Zant Per, ma ? devosion,
'Vid ma kresko an arhant barz yalh ar person,
Ha d'ar Zakramant e houll Fañchig tro ar parkou,
'Vid ma hello ar person debri bemdeiz friko.

Ha d'an aotrou Sant Alar, e houll ar ? ?
'Vid ma hello ar person eva gwin aliez,
Mab ar vatez d'e dro houll da Sant Barteleg
'Vid ma hello ar person eva bemdeiz kafe.

Ar gouillourenn a houllenn bremañ d'ar Rosera,
Ma hello an aotrou person en em zivertisa,
C'hoari eur barti kartou pa vo eur jubile,
Hag a lakont aliez e-barz e peb kontre.

Mar plij da Santez Barba, e houllenn krav he 'fenn,
Ma hello paea e blah, paea e gazetenn.
Goude touch tretamant ouz teñzor ar vro,
E lak kestral dezañ 'vid kaoud e ezommou.

C'hwi kester ha kester ez zo 'vel eur zardonenn,
Prezanti rit ho peñsel ha derhel da houllenn
Hag eun draig bennag neuze digand eure,
Med honnez zo eur hiz fall 'vid salvi an ene.

Pourmen a rit en iliz hag ive kaozeal,
Kemer neud fin hag arhant da gas d'ar presbital.
Ma komprenfe va breudeur ha c'hwi va hoarezed,
N'eo ket evel se eh adorfef ar zalver beniget.

Ar veleien bretoned o-deus degaset ar hiz,
Da lakaad kestral d'ar zent kazi e peb iliz,
Evid kaoud aour hag arhant digant tud o hontre,
E lakaont dizenori servijerien Doue.

En eur rei traou d'ar beleg, n'enorom ket ar zent,
Med ober dismegañs en eur hag er momant,
Pa bronofiser ano eur zant ha klask dezañ eun dra,
E teuer, siwaz, d'e gemer 'vel eur paour o klask e vara.

Med ar zent a zo en neñvou, hag int eüruz meurbed,
'Deus ket ezomm netra diganeom-ni Bretoned.
Hag e teuan d'ho pedi da zond da gompren,
'Vez greet kalz dismegañs o klask dezo an aluzen.

Muioh a enor a reer sur dezo, dond da heuil o buhez,
An hini gar rei aluzenn, kredit d'ar baourentez,
'Vel enorfem ar zent, hag heuil komzou Doue,
Ha gounid or hurunenn pad an eternite.

Dond a hellit da gredi 'neus Doue ar pouvoar
Da rekompañsi ar zent pere zo en e hloar,

Ha n'eo ket gleet mond e-barz an ilizou
Da glask traou d'e vugale pere 'zo en neñvou.

Me ho ped, deuit da gompren, ha c'hwi a deuio da intent,
E reer ive dismegañs da roue an oll zent,
Pa ne fizier ket ennañ dond da rekompañsi
E zervijerien fidel, nag ar Werhez Vari.

Komprenit ma ne ? , kalz arhant a leve,
Beza klasket aluzenn ive d'ho pugale,
C'hwi deufe da lavared vefeh dizenoret,
Kredit e reer ar memez tra d'or Zalver Beniget.

Eneb ar relijion, me ne gomzin jamez,
Disklêria a ra ar veleien kalz a fallagriez,
Oll e teuom da gredi pênaoz zo eun Doue
Gleet deom e adori, entro pad on buhez.

Deuz on homodite, rei bremañ an aluzenn
D'an hini 'neus nesesite, n'eo ket d'ar veleien,
Or Zalver zo bet maro 'vid peb den peher,
Ha gantañ vezom pardonet heb gwenneg na diner.

Ma teuom da zilezel bremañ on pehejou,
O-no ar boneur eün da vond d'an neñvou,
Goude ar vuhez verr-mañ da veza kurunet,
Touez ar zent hag an elez e Palez an Drinded.

AR VELEIEN HAG AN ARHANT.

Ar veleien a zo bremañ e penn ar relijion,
'Zo anjandret an arhant kement en o halon,
Ma teuont siwaz d'ober kalz lezennou nevez,
'Vid suna o gweneien digand tud o hontre.

Allaz, bet zo eun amzer, deom 'oa ket permetet
Dibi kig er horaiz pe e vijem daonet.
An hini a zebrje eun tamm kig en amzer difennet,
Veze deuz an absolven neuze siwaz privet.

Eun neubeudig amzer zo o-deus bet greet eul lezenn,
Ma 'peus arhant da rei dezo, az-po an absolvenn,
Hag urz c'hoaz da zibi kig, kazi pad ar zizun,
Penaoz 'ta e raio bremañ an dud kêz heb fortun ?

Pa n'o-deus ket arhant siwaz da rei dezo,
Vefent taolet en ifern, allaz korf hag ene.
Hag eno chom da zevi pad an eternite !
La ! Ma lar ar veleien ive ar wirionez !

Med eur gaou braz a laront, kredit war ar poent-se,
Evid kaoud aour hag arhant digand tud o hontre,
Dibi kig er horaiz, n'eo bet jamez eur pehed,
Pa n'eo ket gand or Zalver diouzom difennet.

Ar horaiz zo bet formet dre urz ar veleien,
Dre ma zo deuz eur herent kalz a besketerien,
Eun neubeud all anezo a zo marhadourien ?
Ha dre ze o-deus bet formet neuze ar horaiz.

Med ar horaiz bremañ e-neus kaset en e roud,
Hag o herent ouz se o-deus bremañ hirvoud.
Gand ma hallfent kaoud arhant, bremañ ar veleien
Glaskont ket mad o herent en amzer emañ o ren.

Kredit ar pap didropuz, hag e ano Pie nao,
E-neus bet lakaet ober miz Mari barz e vro,
Evid rei sklêr da intent da gement zo prezant
Barz ar bloavez mil eiz kant pevar hag hanter-kant.

Evid kestal d'ar werhez e vo eur femelleenn,
Pehini e ano Mari a deu neuze da houlenn
Eun draig bennag, mar plij, da gas d'ar person,
Zo war poent da vervel siwaz gand ar rann galon.

Dre eo manket ar butun en e dabatierenn,
Ar hoñniak a zo izel barz e varrikenn,
Ha freget eo a dammou ive e zoudanenn,
Ha nemed eur hoz tok da lakaad war e benn.

Ezomm eur boutou galoch hag eur boutou ler,
Eun daol rond ha c'hweh kador, artizan kemener,
'vid ober eur zoudanenn, eun dousenn golhejou,
Eur vantell ha pemp bragou ha deg a rochedou.

Eun neubeud bonejou noz, eur gwele, eur somier,
Hag eun daol noz evid lakaad e penn ar gwele,
Gand an neud fin hag an arhant roet e-pad miz mae

E vo lamet ar person euz ar baourentez.

Deuit 'ta kristenien fidel, karget a garantez,
Pa yafeh da viz Mari deuz an abardaez,
Roit neud fin hag arhant da rei d'ar person,
'Vid e ampech da vervel gand ar rann galon.

Evid ar werhez Vari, e hellit kredi,
Deus ket ezomm a arhant da brena butun-fri.
Deus ket ezomm arhant er bed-mañ evid beva,
Na neud fin d'ober lien evid en em wiska.

Ar person evid derhel renk an noblitate
A laka dizenori rouanez an aelez.
Beleg gand ma 'nez arhant siwaz ne ra forz ebed
Evid ober dismegañs d'ar werhez veniget.

Ar werhez a zo kristenez bremañ barz an neñv.
Ema e-kichenn e mab, or mestr hag on Doue.
E-pad an eternite e vo meurbed eüruz.
Ne glefer ket he hemer evel paourez truezuz.

Koulskoude e roer dezi neud fin ha moh bihan,
Gwalinier biz ha laonez, meur a dammig amann,
Pa varv serten merhed e roer chapeledou,
Kroajou aour ha re arhant, koefou, tavañjerou.

Mari ne deu ket da houl diganeom-ni madou,
Tre ma vezom er bed-mañ, med heuil heh ekzemplou,
E-barz he chastete, kared kalz on nesa,
Evel-se ez enorfem an intron Varia.

E leh 'ta rei d'ar werhez koefou, tavañjerou,
Roit anezo d'ar beorien ezommeg a zo er vro,
Hag e leh rei moh bihan hag amann da Vari,
Roit anezo d'ar beorien evid en em zoulaji.

Ha pa en em gavo eur paour e-tal ho torojou,
Bezit ken umbl dioutañ 'vel pa vefe eun Aotrou !
Ha ma houlenn lojeiz deuz an abardaez,
Ne deuit jamez da refuz ma peus komodite.

'Vel se e teufem d'enori rouanez an aelez,
Gwir mamm or redimer ker, or mestr hag on Doue.
Ha pa vo red deom neuze dilezel ar vuhez
E houlo digand he mab pardon evid on ene.

Bremañ e teuio da lared lod euz tud va hanton
E teuan da vepriza ar gwir relijion.
Eul lodenn a deuio, a gredan, da gompren,
Ne laran nemed ar wirionez e-barz ma hanaouenn.

En eur zond da finisa, me ho ped, Bretoned,
Grit war ar relijion refleksion galed,

Ha c'hwi a deuio da houd o-deus sur ar veleien
Brevet Aviel Jezuz evid kaoud aour melen.